



# CHANSON AR C'HI MOUSTACH

*Var un ton caer.*

**P**EBES domach!  
Maro eo ar C'hi lous!  
Ne velàn mui ar C'hi Moustach  
Gant e vizach marmous.  
Er blo-mâ ezeo decedet  
Câbiten an oll barbedet  
Demeus ar c'hanton :  
Qi ar person  
Zo rannet e galon  
Gant dezolacion  
Hag ar s'heus d'e vignon :  
Ne zorti mui, gant an anqen,  
Demeus e variqen.

A vianig

E voa maget ar C'hi  
Gant bara, yot, esqern ha qig  
Bais e Kersaintjili.

Mæs Yan Gamus, e ber amzer.  
 A zisqas d'ar C'hi e vicher  
 Hag e gademi.  
 Ne voa maryol qi,  
 Hep droug comz a ini,  
 Qer fidel var dro ti  
 Evel ma voa ar C'hi;  
 Ar chaç all a voa canailles  
 E qichen Moustach qes.

Pa voa Moustach  
 E ren e yaouanqis,  
 En devoa an oll avantach  
 Var oll Kersaintjilis.  
 Ar vugale, ar grennardet,  
 Hag ive cals a gos grac'het,  
 Gragez a sqient,  
 Pa remerqent  
 Ar Moustach var o hent,  
 E pedent an oll zent  
 D'en trei divar o hent  
 Mar crient forç, en eur redeç,  
 Var an diaoul bruillec.

Mar de Moustach  
 Meprizet gant an du,

Ne receo nemet peb homach  
 Digant al loened mud.  
 Ar moc'h, ar zaout bag ar c'hezec  
 A respet ar C'hi mastrouillec.  
 Chag ar gigerien,  
 Pa er guelent,  
 Oll e stouent o fen  
 D'o mestr ha d'o doyen;  
 N'eur serri o riden.  
 Ma lavarent, dre o remach  
 Bonjour, aotrou Moustach;  
 Ha ma rent oll ar revorag  
 D'ar C'hi a gonseqanç.

Un dijentil,  
 Daouest d'e galite,  
 O clêvet ar C'hi o c'harzal  
 ▲ dennas e gleze.  
 Crena rê e oll izili,  
 O tremen dre Kersaintjili;  
 Caer en devoa coach,  
 Ar C'hi Moustach  
 A zaillas gant arrach  
 Tre e creis e vizach,  
 Hag en dibarfoultras.

Ne voa qet, gant diou bistolen ;  
 Evit en eur difen.

Chaç ar c'hanton .

Amâ e deoc'h redec ;

Antreit gant reflexion .

Ebars parc ar Garec .

Oll oc'h eus bet an avantach

Da veza caret gant Moustach ;

Deut oll var un dro

Gant ho moechou

Da ober ho canvou

Da Voustach zo maro

Gant re gorfad stripou ;

Hag astit prest d'en enterri ,

Na bate mui va fri .




---

**E MONTRÓULEZ, e ti LEDAN.**